

8.

Peur e skoio ar maro  
 Den n'hell en lavaret,  
 Peur he falc'h hon diskaro....  
 Allas ! n'her gouzomp ket :  
 Marteze a benn eur bloas,  
 Marteze 'benn eur mis,  
 Marteze araok varc'hoas  
 Pe araok fin a deis.

9.

Enn eur gimmiada, Guerc'hez,  
 Ni ra c'hoas eur goulenn,  
 Berr eo amzer ar vuez  
 Ha var nij e tremen ;  
 Pa zeui Doue d'hor gervel  
 Leac'h hor bo da grena...  
 Hor sicourit, Mam zantel  
 Var hon heur diveza.

PERMIS D'IMPRIMER :


Quimper, le 13 Septembre 1872.

JÉGOU,  
 Vicaire général.

Kemper, Moulerez ru an Dudchentil.

=====

CANTIK  
 PELERINET TREMENOU



Ton : *Santez Mari*, pe Ton *Kelven*.

DISKAN :

Itron Chapel Tremenu,  
 Esperans ar c'hlanvour,  
 Plijet ganeoc'h hor chelaou  
 Ha donet d'hor sikour ;  
 Klanv eo ha klanv da vervel  
 Hor bro muia karet...  
 Roit dizhi, Guerc'hez santel,  
 Buez, nerz ha iec'hed.

1.

O kaera rouantelezh  
 Goude ar barados...  
 Pelec'h eo eat da zanvez,  
 Da c'halloud, da vrud koz ?  
 Penos da enebourien  
 O deus bet ar gounid.  
 Ha stlapet da gurunen  
 Er pri dindan ho zreid ?

2.

Allas ! ni hor boa torret  
Lezén ho mab divin :  
Ni pa vezemp gourdrouzet,  
Ne reamp nemet c'hoarzin ;  
Eileac'h dont da zizamma  
Eur bec'h dija pounner,  
Edomp bemdez o skuiza  
Madelez hor Salver.

3.

Ia ! evel eur reverzi  
A zav, à zav atao,  
Ann ourgonil, ar vesventi  
O doa beuzet hor bro ;  
Ar zul veze profanet  
Eb aoun ebet na mez  
Gant labourou milliget  
E kear ha var ar mez.

4.

Fall eo mont eneb Doue  
Ha goapaat he lezen,  
Risklus eo dastum arne  
Ha tan a ziouc'h ar penn :  
Rag ar gurun a darzo  
A greis ar c'houlmoul du  
Ha var he lerc'h ne jomo  
Netra nemet ludu.

5.

Savet eo deis ar goler,  
Sounet heur ar justis,  
Enebourien eb niver  
En em daol var ho freiz :  
Kre int evel leounet  
Ha kriz evel bleizi,  
Evel chass int konnaret...  
Bro-c'hall zo great ganthi.

6.

Nann, nann, Guerc'hes Tremenou  
Ar Frans ne varvo ket,  
Lenvo reomp d'hor pec'hejou,  
Ni vezo pardounet :  
Ennoc'h emañ ar frizians,  
Mam dous ha leun a c'hras,  
Dreizoc'h e savo Bro Frans  
Ken nerzus ha biskoas.

7.

Araok kimmiada, Guerc'hez,  
Ni ra c'hoaz eur goulen ;  
Berr eo amzer ar vuez  
Ha var nij e ar men ;  
Pa zeui Doue d'hor gervel  
Leac'h hor bo da grena...  
Hor sicouit, Mam zantel,  
Var hon heur diveza.